

ar verch yaouank a bournmene  
 Dindan eur Loreen  
 ar c'habiten iaouank a he de goelet bemde.  
 — Deud tu ganen me mestrez ma mestrez deud ganen,  
 Ma lako en assuranç o heurejo goude se

Sallokras emezi, mond ganec'h me hin ked  
 ma mam zo var e goele klan, pressan et maro ve groet  
 ..... bis lakat er maro en e helon  
 ag eur plac'h iaouank a ia dan arme koll e reputation.

Sallokras Katerinik c'hwi ne kolfet ked  
 me preno dec'h eun habid ag a vo passemantet  
 eun tok kastor var o pen a c'hwi hanvel deus eur kadet  
 — montez montez la belle sur mon cheval gris  
 mo kassin da loja dar ger gloz a paris.

en Paris pa he arriet voar an oaled e asseet  
 en guis eur vagerez  
 an hostizez en remerkas an eus dezi lavaret  
 ..... bis a laras dei promptamant  
 c'hwi zo eur plac'h diwar ar mez ag a plich d'am santimant

— salokras emezi plac'h diwar ar mes ne non ked  
 me zo kadet digentil bugel deus a ti mad  
 a zo deud dan arme dre ma bolonte mad  
 — ma vicher kadet digentil bugel evel ma leret  
 e vicher oc'h an dol o efa guin kleret  
 e voac'h deus an dol kompagnonez o goanian  
 ag arc'hant en o godello a c'hwi kontant da pean  
 — war ar prepojo ze ar c'habiten zo entreet :  
 Koaniet koaniet me(r)c'h iaouank komeret o plijadur  
 Ous koste eur gabiten iaouank c'hwi a kousko a dra zur  
 noa ket anter ar banket ar verc'h iaouank zo desedet  
 Tostet tostet trompette a pio loas doucement  
 mar ge maro ma mestrez ma halon zo dolant  
 pelec'h e vo interet flourdroulizen an oll merc'het  
 lekomp i er jardin e zad dindan eur boket roz  
 me a pedo doue evouiti ag an de ag an noz

lakom i er jardin e zad dindan eur boket lore  
ni a pedo doue ewiti koulz an noz evel an de  
  
dioret din o tor va zad ma mam karet  
me meus groet va maro tri de a ma henor sauvetet  
Leret tu din ma Merc'hik gant piou orc'h enlevet  
Gant eur c'habitien iaouank e(u)n den redoutet  
e voa sevel an truajo diwoar ar payzantet.

*écriture de Kerambrun d'après Luzel.*

*Il n'y a pas de titre dans le ms. Penguern.*